

(378)

Chanson
Ar Plac'hic, paour ha Fur.

Var ton : Debnijour, Fantic coant.

Diz d'c'h, Fantic coant.....
Mes pebes chenchamant!!.....
Diveza m'ho quelis
E voa fresq hoc'h invis;
Mes abaoù, me gred,
Noc'h eus-hi get chenchet.

Joa vras ameus ourzoc'h,
C'hoas em bije muioc'h,
Ma vije ho qenet
Euy nebeut decoret
Eus a netadurez.....
Pardonit, va Mestrez.

(379) Na ellàn get credi
E ve dre ziegui,
Qen nebeut supposi
E ve dre loustoni
O cuellàn, plac'h yaouanq,
Eñ o lingeri fancq.

Arzarit din, hep mez,
Doare ho tiequez;
Paourentez zo calet,
Mes n'ey des get pec'het:
Lavarit din hep aon
Ha c'houi a vang a'zaon.

Autrou, e tij va mam
Ne gafet get un tam;
Nac arc'hant da brena,
An dra-se zo goassa;
Evelse n'en don get
Da veza tamallet.

(380) Ne ve cavet em zyg
Nemet teir scudet pri,
Teir loa goad, ur bodez,
Ur podic da glasq lez,
Diou scaon, un tabore,
Ur bang hac ur quele.

Cavet e ve ouспен
Un tamic chaoudouren,
Ur gos cramailleren,
Tiebez, pillic, pladen,
Evit oza crampoerz,
Mes nonpas alies.

(381) C'hoas ur c'hibinou mad,
Pa ve lin da gribat,
Daou gar evit neza,
Travouill da zibura,
Tamouez da oza 'r bleud,
Pa vez querzet ar neud.

N'oy eus get femp quennec
Da gaout un tam blonec,
Nac un dornad olen
Da zalla ar zouben,
Hac evit ober tan
Hoy eus ur garquic lann.

Cetu arze, Autrou,
Invariant va quiriore.
N'ey deus get er c'hontre
Ur plac'h qer paour ha me;
Mar clasqit ar madou,
Chenchit tu d'ho pajou.

340

Var quementse, Fantic,
N'en doc'h get finvidiq?
Mes ho comzou quiron
A ravis va c'halon:
Seulvui ma ho clèvan,
Seulvuioc'h ho caran.

Me zo ur Marc'hadour
Dre zouar ha dre zouar;
M'emeus dour hac arc'hant,
Ha demeuranç charmant,
Gant sourci vras meublet,
D'ho receo, pa guerfet.

Tri pe bêvar bloas do
E valeàn dre ? r ro,
Erit clasq ur pried,
Ha n'em eus get caret
Tri d'am zantimant,
Nemedoc'h, plac'h prudant.

Lavarit din eta
Ha me a dle conta
Da gaout ar blijadur,
Dre voueur dreist-natur
D'ho quelet oc'h orni
Dre ho qenet va zy?

Mar bez contant va mam,
Me na zifferin tam;
Dre vemes carante
Deomp hon daou he bete;
Va c'halon zo mantret
Mar bec'h discouriet.

Deiz maol, greg henorus,
Mam vad, fur hac eurus;
Mam d'ur verc'h enorabl,
Caer, modest, agreabl,
Am ho erit pried,

(382)

Ma n'am refusit get.

Birviquen ne gredan
Autrou, vec'h deut amàn
Erit ober goulen
Berneus ur vergeren
A bep tra dibourve,
Sepet a burete.

(384)

Sellit e pes castel
E chom an demezel;
Guelit e peb costez
Ar brassa paourentez,
Erit ho tistrei
Deus an nep fantazi.

Mam, eus ho tizeg
Em eus anaoudeguez;
Var quementse tevomp,
Hon tri en em glêvomp
Da vevañ en hon èz
Dre va finvidiquerz.

(385)

Autrou, ne dleàn get
Refusi ho reget;
Dre ho tistintores
Er choas eus ur vestez,
E zouar sur e rentfet
Euruz va merc'h caret.

Dre o friedelez
Euruz voent assambles.
Douster ha yaouanquis,
Modesti ha coantès
A zo quell avichou
Equet an oll vadou.

fin

F. Guenneur.